

**DA VEMOR**

**AR GONIDEC,**

DA BEHINI E ZEUS SAVET EUR BEZ.

**E KONK,**

**BLEG'E E ZEO LAQET E BELEGOT,**

D'ar Sul, 12 eus a vis Here 1845.

Seiz vloas zo en deiz-mâ hor mignon GONIDEC,  
Ar gwizieka den en hor iez Brezonek,  
Goude pemp mis gouzanv a rentas e ene,  
Evel eur gwir gristen, etre daouarn Doue,



Eur c'hoant vras hor boa oll ma elje dont un deiz  
E gorf paour da vezia en hor brô ger a Vreiz ;  
Hor c'hoant zo aotrêet , hervez m'er goulenneimp ;  
Mignoned a Baris zo deut d'en digas demp :  
E relegou , hirio , goude oll daskoret  
En e vrô ger a Gonk , el lec'h ma voe ganet ,  
A ya da arzaôï. E genvrôiz eno ,  
Evel gwir gristenien , evitân a bedo.

Endra pad e vuez e tle peb gwir Vreton  
Kaout memor GONIDEC e gweled e galon ;  
Rak dezân e tleomp talvoudegez ar reiz  
A velomp zo hirio er iez ker eus hor Breiz.

Breiziz ! unanomp oll hor pedennou bremâ ,  
Stouet var hon daoulin amâ var ar bez-mâ ,  
E pini eo laqet corf paour hor mignon ker ,  
Hak a greiz hor c'halon pedomp oll hor C'hrouer  
Da zont da zic'haoui eus eur vuez poannius  
Eun den a voe ker mad ha ker karantezus !

Hirio e velomp mad pegement eo eürus  
Beza renet atao eur vuez vertuzus.  
Sellit hor bêleyen hac hor c'henta pastor  
O renta d'hor mignon an diveza enor ,  
Dre o c'hanyou a gaoun etrezec hak an êe ,  
O pedi evitân madelez eun Doue.  
Unanomp hor peden gant re e vinistret ,  
Hac eus eur gwir glac'har bezomp oll treantet.

N'eo ket d'ar brasderiou, na ken-nebeut d'an aour  
E renter enoriou ( GONIDEC a voa paour );  
Mes d'an den gwiziek, d'an den leal kristen,  
Na vo ankounac'hét gant nep Breiziad biken.

Evit dont da gendele'h atao e peb Breton  
Demeus AR GONIDEC memor en e galon,  
Eur *Men-hir* var e vez a zo bremâ savet,  
Var behini e zeus gant eves bras skrifet:

*« Peulvan, diskid d'ann holl hanô AR GONIDEC,  
« Den gwiziek ha d'en fûr, tâd ar gwir Brezonek. »*

Ha neuze, izelloc'h, var eur men all e vo  
Ar geriou-mâ skrifet ivez e iez hor brô:

*« Ganet é Konk, 4 miz gwengôlô, 1775.  
« Maro é Paris, 12 miz héré, 1838.  
« Bèziet é Konk...., an 12 eus a vis here, 1845. »*

Eun niver bras a dud eus a bep korn ar vrô  
D'ar zul, daouzek here, en em gavo eno  
Evit pedi Doue var bez AR GONIDEC,  
Enor demeus hor Breiz, reizer ar Brezonek.

Unani rân amâ va feden gant ho re,  
Mignoned GONIDEC, a weled va ene;  
C'houi pere ell hirio peur-ober ho tlead  
Var bez eur gwir Breiziad, mignon fur ha den mad.

D'am e'halon e vije eur frealzidigez  
Ellout monet ivez da bedi var e vez ;  
Hogen pa ne ellàn , nòs ha deiz em speret  
Hano Ar GONIDEC am bo bezand bepret.

Erz dont da gendeic'h arzo e pep lison  
Hecus Ar GONIDEC moner en e yolon  
**Eur Breiziad.**  
Eur Breiziad e vez e reo lison  
Var lison e vez gant eus bras gendeic'h :

e Tolson , dind d'eur bell lison Ar GONIDEC  
e Breiz gendeic'h ha d'eur lison , dind er gendec'h Breiz.

Ha neuz , inlison , var eur man all e vo  
Ar gendeic'h arzo ivez e vez hor d'bo :



e Gendec'h e Breiz , e Breiz gendeic'h , 1775  
e Breiz e Breiz , e Breiz gendeic'h , 1838  
e Breiz e Breiz , e Breiz gendeic'h , e Breiz e Breiz , 1845

Erz niver d'ur e dind eus e pep lison ar reo  
Ha er lison , dind er gendec'h Breiz , eus er gendec'h  
Erz gendec'h Breiz var lison Ar GONIDEC  
Erz gendec'h Breiz , e Breiz gendeic'h Breiz.

Erz gendec'h Breiz var lison gant ho reo  
Erz gendec'h Breiz , e Breiz gendeic'h Breiz ;  
Erz gendec'h Breiz e Breiz gendeic'h Breiz